

Dornskridoù Milin : Kanaouennoù

## 17. ( EUL LUNVEZ GOUDE KOAN...)

eul lunvez goude koan pa oann-me koaniet mad  
 ha me mont d'am liorz evit bale eur pennad.  
 Me klevet eu/nn eostik/° war ar bod o kana, °a-us: l labous  
 kana a rea ker koantik, ker gae ker manivik  
 giz ma ve eunn hograou peotramant eunn eostik  
 ne deo ket ..... ez oun-me ankeniet :  
 va c'hildant zo o vreina ha va bleo zo louet.  
 - Lavarit, plac'h iadouank, perak oc'h ankeniet,  
 pe c'houi zo klan a galoun, spouronet ho spered  
 - N'ounn ket klan a galoun, na troublet va spered  
 gant keuz d'am iadouankiz /eo ez ounn ankeniet/°. °a-us: zo  
 Nijet eo va iadouankiz, eat eo enn he roud abiou tre-  
 hag em be peder askel n'oun ket vit he zizout. menet.  
 hag em be pevar zroad hag henvel oc'h ar c'had  
 da vont warlerc'h va iadouankiz n'helfen ket....